


● ● ● Ça fourmille



● À LIRE
en breton
et gallo sur
cotesdarmor.fr/
mag201

AR GEVREDIGEZH LES FOUHMIS SOLI'TERRE

Gant ar merien ne vez dismantret netra



STÉPHANIE PRÉMEL

La Fourmilière, e Plouan, zo un dachenn 500 m² lodennet etre an adaozerezh hag an drivet-lec'h, ma vo dalc'het atalieroù hag ur c'horn kafe-ostaleri ne vo ket pell. E kreiz al luc'hskeudenn emañ Karine Jouas, prezidantez ar gevredigezh Les Fourmis Soli'Terre, hag en he c'hichen, Alexandre ha Pierre, tud a-youl-vat



Sklaer eo evel lagad an naer : pa vez produet pe distrujet e vez saotret. Terriñ ar chadennad vis-fall-se, setu kredo ar 80 merienenn e Fourmis Soli'Terre. Nerzh zo gant ar gevredigezh-se, staliet e Plouan, he doa digoret un adaozerezh e 2021, hag evel-se he deus lakaet ouzhpenn 50 tonennad traoù a bep seurt da vezañ adimplijet. Emañ o tihan en em staliañ en ul lec'h nevez, 500 m² anezhañ, hag emañ e-sell d'ober labourioù e-leizh.

C'hoarioù, listri, pezhioù dilhad, levrioù, bountelloù, gouleier, kement-se en ur stad vat : 20 km er Su da Zinan emañ an adaozerezh La Fourmilière, e takad ar gar e Plouan, ur gwir baradoz evit an dud a blij an traoù eil dorn dezhe. Simpl eo ar mont en-dro : an dud a laosk an traoù n'o deus ket ezhomm ken evit netra, hag a vo talvoudus evit tud all : « *Priz frank betek 1 c'hilo ; en tu all da 1 c'hilo eo 1 € ar c'hilo. Tikedennoù a lakaer war ar mekanikoù tidredanerezh hag ar pezhioù arrebeuri bihan* » a lavar Karine Jouas, diazezer ha prezidantez ar gevredigezh. Pep tra a oa digoust a-raok ar 1añ a viz C'hwevrer met rediet int bet da lakaat da baeañ. « *E-pad daou vloaz e oamp staliet en ul lec'h 80 m², prestet dimp gant Ti-kêr Plouan evit netra. Ret e oa dimp kaout ul lec'h brasoc'h abalamour ma vez roet muioc'h-mui a draoù dimp. Un dro-gaer eo bet evidomp pa c'h eo bet prenet ar fraost industriel-mañ gant an Ti-kêr : feurmiñ a reomp 500 m² eno evit 500 €. Gant-se ne c'hallomp ket ober mod-all, ret e oa lakaat an dud da baeañ.* »

Traoù mat da c'houzout lesfourmis soliterre.fr
Trivet-lec'h hag adaozerezh La Fourmilière, 36 A Bd ar Gar, 22830 Plouan
Adaozerezh digor d'ar Merc'her ha d'ar Sadorn, etre 10e ha 12e hag etre 2e ha 5e
Les Fourmis Soli'Terre a vez kavet er rouedadoù sokial
f @ t j

« Hadañ a reomp »

Da lenn : hon zeulad war koust an dilhad diouzh ar c'hiz cotesdarmor.fr/ fast-fashion-il-est-temps-de-dire-stop

UN DRIVET-LEC'H SOÑJET EVIT LAKAAT AL LIAMMOÙ SOKIAL DA CHOM BEV

Krouet e oa bet ar gevredigezh e 2019 diwar ur gri-forzh. Hini Jules, 12 vloaz d'ar mare-se, a oa ankeniet o welet « *stad fall ar bed, ha lavaret a rae n'en doa ket c'hoant da vezañ tad abalamour ma ne c'halle ket laoskel bugale war ur blanedenn evel-se...* » he deus soñj Karine Jouas. Ur pezh stroñs e oa bet evit ar plac'h-se eus Plouan, ha hep gortoz pelloc'h e savas ar gevredigezh Les Fourmis Soli'Terre. Jules a gemeras perzh enni ha dindan nebeud amzer en em gavas tud all eus ar vro, un daou-ugent bennaket en holl, « *ur skipailh entanet, a bep seurt renk pe oad* » eme ar brezidantez.

Ar gevredigezh, er penn-kentañ, a rae dastumadegoù lastezioù, atalieroù evit sachañ evezh an dud pe aozañ produioù an ti... ha buan a-walc'h e teuas ar soñj da sevel un adaozerezh abalamour da « *lakaat an dud da gompren ec'h eo arabat prenañ traoù nevez-flamm-flimin* » eme Karine. En nebeud amzer e reas berzh,

hag an Departamant memes en deus roet priz ar ganaded d'ar gevredigezh er genstrivadeg Donezonou dispar, aozet gantañ. Les Fourmis a faot dezhe mont pelloc'h c'hoazh. « *An hanter eus ar 500 m² ac'h ay*

d'ober un drivet-lec'h. Savet e vo ur c'horn kafe-ostaleri, atalieroù evit deskiñ fardañ traoù an-unan... E berr gomzoù, ul lec'h soñjet penna-benn evit lakaat al liamm sokial da chom bev etre ar rummadoù », eme Karine, he daoulagad bouilh.

Ha Jules, penaos emañ kont gantañ ? Lisead eo bremañ, ha strivet en deus forzh pegement evit lakaat digeriñ ur stal dilhad kozh en e lise, lise Feunteun an Doureier e Dinan. « *Hadañ a reomp* », a lavar rouanez ar merien evit klozañ. ●